

52

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR-SAKR

gat an Tad BERTHE, Redemptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSON BANNALEC.

SEIZVED LEORIK.

JEDON HA SAMSON



NEUVILLE-SOUS-MONTREUIL

IMPRIMERIE NOTRE-DAME DES PRÉS

53A

ISTORIOU


TENNET EUZ AR SKRITUR - SAKR

gat an Tad BERTHE, Redemptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSON. BANNALEC.


SEIZVED LEORIK.

JEDEON HA SAMSON



NEUVILLE-SOUS-MONTREUIL

IMPRIMERIE NOTRE-DAME DES PRÉS



JEDEON HA SAMSON

I.

AR BARNERIEN.

GOUDE maro Josue, he dud a i eas ama hag ahont, er plassou a blij e dezho pa zoa guir oant mistri, hag e ouent evel-se mesket gat an idolatred. E tu ar c'hresteiz, pemp prins philistin a ioa c'hoaz-e c'houarn ar c'herriou ha kerriadennou a-ed ar mor braz. E kreiz ar vro, an Hetheaned, an Amorrheaned hag ar Jebuzeed a jomme mistri var ar menez hag a ziskenne aliez en draoñien. E tu an anter-noz, var dinaou an Hermon hag al Liban, ar Gananeaned hag ar Sidonianed ne reant a bep-tro nemed eur famill gat an Israelited. Doue en devoa lezet var an douar ar restachou poblou-ze, milliget ha mallozet, da genta, evit ober tud a vrezel euz an dud iaouank n'ho doa ket c'hoaz great netra ; hag ouspenn evit fusta ha

kastiza ar bobl a Israel ma na zent ket bepred ouz Doue.

Epad ma vevas Josue hag he gonsorted, ar pezh en devoa gourc'hemennet Doue e kenver an dud estren a oue miret penn-da-benn. Pa varvas, ar bobl a c'houlennas digat Doue piou da lakaat e penn ar vro, piou a dleont da gemeret evit ho c'hass d'ar brezel a enep ar re a jomme c'hoaz euz ar Gananeed. Respountet oue dezho oa Juda a dlie digeri ar brezel. Kerkent, tribu Juda ha tribu Simeon en hem zavas assamez a enep ar Jebuzeed hag ar Ferezeaned. Laza' rejont dezho dek mil den e kichen Bezek. Ho roue a oue paket he unan, Adonibezek, an den kriz. Trouc'het oue dezha he vizied daouarn ha treid, hag epad ma verzeriet anezha evel-se e lavaras : « Setu petra' meus great ive va unan da zek ha triugent chef. Goudeze e rean dezho dribi e starn an daol ar restachou euz va fred. Doue a ra d'in evel a meus great d'ar re all. » Kasset oue da Jerusalem hag eno e varvas. Jerusalem a oue kemeret ive gat an inimied ha rostet a-bez. Hogen, na soudarded Juda, na goudeze soudarded Benjamin ne eljont kass ar Jebuzeaned kuit euz a gastel Sion.

Goude beza skoet var ar Gananeaned en draonien ha var ar menez, tribu Juda, bleinet gat Kaleb, a goezas var tud Hebron ha Dabir. Kemeret a reas Sephaat a oue hanvet goudeze Horma, da lavaret eo Malloz, abalamour oue great eno kement en devoa gourc'hemennet an Aotrou a enep ar c'heriou milliget. Kemeret a reas, ouspenn, Gaza, Askalon hag Akaron, var douar ar Pelistined. Goude ma o devoa gounezet ar c'heriou-ze

ha kannet tud ar menez, soudarded Kaleb a gemer ho ehan. N'en hem gavent ket kreñv aoualac'h evit dont a-benn euz a dud an draonien hag euz ho c'hirri houarn.

Bugale Joseph, Ephraïm ha Manasse, a reas evel ho breudeur a Juda. Brezel a reant ive d'an idolatred euz ho bro. Pell a ioa edont e klask dont a-benn euz a gear Luza ha ne reant nemed koll ho amzer. Eun deiz, e veljont eur goaz deuet er meaz dre eun toul-kuz. Pega' reont kerkent ennea hag e lavaront : « Diskuez deomp dioc'h-tu dre he hent mont e kear hag e vezo lezet da vuez ganez. » Ar c'heaz den a zentas hag holl dud Luza a oue lazet.

Mez, siouaz ! dre ma zea kuit ar re goz, ar promessaou great da Zoue a icia en ankounac'h. N'oa ket kement a euz mui ouz an idolatri hag an idolatred a ioa evitho tud evel ar re all. Ne reant ket allians gat ar Gananeaned abalamour ma zoant eur ouenn dud milliget ; mez gouskoude n'ho c'hassent ket euz ho zoues. E leac'h kemeret ar c'heriou, e kavet essoc'h ha guelloc'h ober dezho paea kargou, taillou. Epad meur a vlavez, setu ar pezh a rejont, daoust d'ar pezh en doa Doue gourc'hemennet dezho ken aliez a vech. Ephraïm ha Manasse ; Zabulon ha Nephtali, Dan hag Aser a gerze dre ar memez hent hag a fachas outho an Aotrou Doue.

Eun deiz, an eal a ioa bet guechall e kamp Galigna e kennerzi Josue hag o lavaret dezha kerzet varzu an douar prometted, a apparissas da vugale Israël hag a lavaras dezho euz a berz Jehovah : « Me a meus ho tennet euz an Egipt evit ho tigass

d'ar vro-ma. Me a meus roet va ger ne dorrin morse an alians great gat Israël, a bouez ma ne droio ket Israël gat an idolatred ha, zo-ken, ma pilint ho aoteriou. Abalamour m'oc'h eus manket d'ho ker, ar boblou-ze holl, a moa espernet c'hoaz evit o c'hamproui, a zavo en ho c'henep hag ho doueou a gasso ac'hanoc'h da netra. » Pa glevchont komzou an eal, bugale Israël a zavas keuz gatho. Diroll a reont da ouela ha krial a rejont kement gat ho glac'har ma oue hanvet al leac'h-se : *park an dae-lou* : Ouspenn-ze kalz loened oue lazet e sakrifiks da Zoué evit kaout pardoun digatha.

Kement-se a loa mad : Mez ne zalejont ket da drei kein adarre da Zoue, evel m'hen doa lavaret Josue diagent ha stoui a rejont dirak an doueou faoz. Er penn kenta euz an dud fall edo tribu Ephraïm ha tribu Dan.

Eur c'hreg euz a verez Ephraïm, c'hoant dezhi da gaout eun doue ive en he zi evel ar Gananeaned a roas *tri c'hant' sikh* arc'hant da eun orfeber evit ober dezhi eun idol. Goassoc'h ha sottoc'h c'hoaz eget he vam, Mikaz a zavas eun aoter en he di evit lakaat varnhi he zoue nevez, a brenas eur guiskamant belek hag a lakeas he vav da velele d'he zoue. Eul levit, kar dezha, torret euz he garg, a deuas da c'houlén lojeiz digatha. « A galoun vad, a lavar Mikas. Pa zeo guir e maoc'h diimplij, c'hui a jommo ama ganhen. Me a roio deoc'h dek pezh arc'hant bep bloaz, guisket ha maget ; hag e vezoc'h hor belek. » Al levit ne c'houlén ket vell, hag ar c'hezik Mikas a drid gat ar

Var-dro pemp kant lûr.

joa : « Bennoz Doue, emezha ; setu e meus em zi eur belek euz a famill Levi. »

Hogen, d'ar poent-se tribu Dan a gawe re enk he zachen hag a glaske douarou el leac'h all. Kasset oue pemp euz ar guella soudarded da ober eur bale tro-var-dro. Diouezout a rejont e ti Mikas hag e c'houlénjont digat al levit petra' rea en ti-ze.

« Mikas, emezha, en deus va digemeret en he di, ha belek oun d'he Zoue.

— A plijoud a raffe deoc'h goulén digat an doue-ze a tenna' rei da vad ar pezh or beuz c'hoant da ober ?

— It e peoc'h, a lavar al levit, Doue a zo ga-neoc'h. »

Ar pemp den-ma a erruas e Laïs, kear ag a zo leun a Zidonianed. Ar re-ma, tud didrouz ha laouen, pinvidik an darn vuia anezho, a veve eno dispount ha dizoursi, pell dioc'h Sidon, pell dioc'h ar c'heriou braz. N'oa ket diez dont a-benn anezho. « Deomp, a lavare ar pemp kannad ; eun douar druz ha pinvidik a zo eno ha ne vezo ket diez da c'hounid. » Roet oue dezo c'huéc'h-kant den evit mont da gemeret Laïs. Pa edont e tremen dirak ti Mikas ar pemp ispioun a lavaras d'ar zoudarded e zoa en ti-ze eun idol, eur guiskamant belek hag eur belek. Dioc'h-tu ar c'huéc'h-kant den en hem lakeas dirak an or. Etretant ar pemp kanfard, var digarez saludi al levit, a beg en idol hag en Ephod. Ar beleg a ra ar pezh a c'hell evit derc'hel he denzor. Mez pa vel ar zoudarded e kichen an or, e lez anezha gatho, en eur hirvoudi a-forz.

« Aoualac'h ! a lavar dezha al laëron. Peoc'h !

ha deus ganeomp-ni. Daoust a n'e ket guelloc'h d'id beza belek eur vro eget belek eun ti ebken ? »

Ho c'haoz a blijas tre d'al levit ha mont a reas d'ho heul gat he zoue hag he viskamant.

Pell oant eat dija pa deuas Mikas var ho lerc'h, gat an holl dud euz he di. Ar re-ma, drouk enno, a laoske iouadennoù spountuz. An Danited a zistroas outho hag a c'houlennas digatho perak e reant kement a drouz.

« Petra, a lavar Mikas, laërez a rit va doue, kass a rit ganêoc'h va belek, eb kounta ouspenn va loened, hag e c'houlennit c'hoaz petra' glaskan !

— Guelloc'h a raffles prenna da c'hinou, a respountas tud Dan; anez-se, e zeï drouk en hor souldarded hag e savo truez ouzid hag ouz da dud.»

Mikas a vele ervad n'oa ket kreñv aualac'h evit stourm outho hag a zistroas sioul d'ar gear. Souldarded Dan a i eas bete Laïs. Laza' rejont eno an holl, braz ha bihan, ha lakaat a rejont an tan-ouall e kear. E leac'h ar gear rôstet-se, e savchont eun all ag a oue hanvet Dan, hano ho zad. Eno oue tronet ho idol ha lakeat al levit d'he diouall. Dirazhi e stouent. Dezhi oue rentet peb enor, epad ma chommas an tabernakl e kear Silo.

N'e ket bugale Dan ebken, hogen ar broïadour all a zaouline ive dirak Baal, Astaroth ha doueou all ar baïaned; ha da heul an idolatri e tirollas a bep seurt techou fall ha mezuz.

Eul levit euz a Ephraïm a ioa dimezet da eur vaouez euz Bethleem. Houma a ioa mouzet outha ha distroet d'he c'hear. Al levit a i eas var he lerc'h: Ar peoc'h oue great, ha setu int-hi o daou e tistrei

da Ephraïm. Pa edont e tremen dre gear Gabaa, e bro Benjamin, eun den koz a ginnigas dezho lojeiz evit an noz. Setu an dud-se, poulzet gat an ioulou fall, gat al lubrisite, a deuas da gerc'het ar c'hreg-se hag a reas dezhi loussa ma c'hellent beteg ar mintin. Antronoz, oue kavet maro var treujou an ti.

Sot gat an drouk a ioa enna ha gat an dizeper, al levit a gemer eur c'hleze; ober a ra gatha daouzek tam euz a gorr he c'hreg hag e kassunan da bep tribu, en eur c'houlenn digatho ne lezint ket an torfed euz-se, eb tenna venjans anezha. Pev ar-c'hant mil Israelit en hem zastumas e Silo, deuet euz a bep tribu, evit goulenn digat tud Benjamin ma vije lakeat etre ho daouarn ar re o devoa great an torfed. Sevel a reas eur brezel kriz ha tribu Benjamin oue darbret dezhi mont da netra.

Poent oa da Jehovah dont da lakaat reiz en dud-se o deus troet kein dezha. Bete dek guech ho diskaras hag ho lakeas evel sklaved dindan dreid ar boblou divar-dro. Mez dek guech ive en he drugarez, pa droent ho daoulagad etrezek enna, e tigassas dezho tud evit ho zenna a boan. An dud-se eo ar re a zo hanvet *Barnerien* Israël. Dreist ar re-all, ema Jedeon ha Samson. An daou-ze, epad pevar c'hant vloaz, a lakeas ar bed mantret dre an taoliou burzuduz a reant.



II.

DEBORA, AR PROFETEZ.

DGENT vloaz goude maro Josue, ar bobl a Israel a droas kein da Zoue. Jehovah neuze a zavas en he enep eur roue gallouduz, Kuzan, roue ar Mezopotamii. Epad eiz vloaz, an Israelited a rankas paea kargou d'an den rust-se ha goudeze ouent taolet e sklavaj. Mez a zao gatho pa velont int diskaret ken izhel hag e pedont Jehovah d'ho rekour. Doue a roas dezho eun den kalounek, hanvet Othoniel. Karget gat Doue da zavetei he bobl, Othoniel, ar c'henta a varnerien Israel a zavas eun arme hag a gannas ar roue Kuzan, gat sikour an Aotrou. Goudeze, e c'houarnas Israel e douk daou ugent vloaz, ep ma vije bet an disterra trouz.

Divezatoc'h, bugale Israel en hem zavas adarre a enep Doue. Doue, evit ho c'hastiza, a zigassas varnho Eglon, roue Moab hag assamez gatha bannennou Amalestid hag Ammonited. Goude beza treiziet ster ar Jourden, Eglon a gemeras Jeriko, kear ar palmez; ha lakaat a reas an daouzek tribu e sklavaj. Trivec'h vloaz dioc'h-tu e vevchont er stad truezuz-se. En hem drei a reont adarre varzu

Doue; ha Doue, pa vel o deus keuz d'ho fec'hed, a gass dezho eun den euz an dibab evit ho zavetei. Aod oa he hano, euz a dribu Benjamin.

Abaoe m'oant e sklavaj, e ranke kannaded mont, bep bloaz, da gass d'ar roue Eglon, an taillou en devoa lakeat varnho. Aod a oue karget, er blavez-se, gat he genvroiz da gass an arc'hant d'ar roue. Araok diblass, e lakeas ober dezha eur c'hleze ag a drouc'he dioc'h an daou du. Al lenven n'oa ket hirroc'h eget pal he zourn. An arm-ze a zo kuzet mad en he zillad. Treuzi a ra ar Jourden gat he gompagnunez; kinnig a ra d'ar roue ar pez a arc'hant a rankent rei bep bloaz hag e tistroas dre hent Kanaan bete Galgala. Eno oa savet var an tron idolou Eglon evit goapaat ar guir Doue. Aod a deuas da zonj dezha neuze euz a Josue, euz an arc'h allians bet ker pell all e bord ar vro-ze. Pa vel doueou ar baianed mistri var an douar-ze a viraklou, e za drouk ennya. Lezer a ra eno he gonsorted hag e tistro e unan da vro Moab da c'houlen digemer digat ar roue. Kasset dirak ar roue ha tud he balez, e lavaras kerkent da Eglon:

« Me a meuz eun dra da lavaret deoc'h ha deoc'h ebken. »

Eglon a reas sin d'he dud hag ar re-ma a ieas kuit. Kass a reas Aod beteg ar gampr-ma vije e chomm enni en hañ. Pa zeo azezet var he dron, e lavaras d'an Israelit komz.

« Eur gemennadurez a zigassan deoc' a-berz Doue, eme Aod. »

Ar roue a zavas en he za dre respet evit Doue Israel. Ker buhan ag eul luc'heden, Aod a beg en he gleze har her sankas dezha gat kement a nerz

en he vouzellou ma zejont ebarz kountel ha troad. Ar roue kofek ha lourd a guezas a stok he gorrve leusker zo-ken eur griaden. Aod a lez he gleze e kof ar roue, a brenn holl dorojou ar gampr hag a dec'h kuit dre ar penn-pella. Abalafin, servicherien ar palez, skuiz e c'hortoz ma vije deuet Aod 'er meaz, a ias e kambro ho mestr. Ne gavont nemed eur c'horv maro, beuzet en eur poullad goad.

Aod n'oue ket pell evit treuzi Galgala. Diouezet var ar menez, e lakeas sini gat an droumpill evit gervel he dud hag e lavaras dezho oa maro ar roue a rea dezho kement a boan.

« Deuit d'am heul, emeza ; Jehovah a laka ar Moabited etre hon daouarn. » Arme Israël hentchet gat Aod, a ziskennas evel eur barr-dour beteg ar Jourden hag a bostas e kement leac'h ma c'hellet treizia. Evel-se, ar Moabited a ias var ar meziou, e kostez Jeriko ha Galgala, ne eljont ket distrei d'ar gear da zikour ho breudeur, en henvelep fessoun ma ouent kannet holl, lod en tu all ha lod en tu-ma d'ar Jourden. Dek mil euz ho guella tud a jommas var an dachen hag euz ar re a ias eat en tu all d'ar Jourden, ne zistroas ket unan d'ar gear. Eur vech kuitez gat Moab, Israël a vevas e peoc'h epad pevar-ugent vloaz. Ne deuas nemed ar Filistined da glask trabas outho, Mez eur barner nevez, hanvet Samgar, a lazaz dezho c'huoc'h-kant den gat eur zouc'h-alar. An taoliad-se a denas ar c'hoant digatho da zistrei.

Epad ar blavezio-ze a ehan, e tizezas dezho adarre ankounac'haat ho Doue ; ha Doue a sko varnho goassoc'h-goaz. Jehovah a lakeas he bobl e galloud Jabin, roue Asor, ha Sisara, he jeneral.

Jabin a ias eur roue kreñv. Pemp kant kar houarn en devoa ha filchier stag outho. Epad ugent vloaz e talc'has an Israelited dindan he dreid. Hogen, d'ar mare-ze, ar profetez Debora a ias e varn ar bobl. Azezet dindan eur vezen palmez ag a zouge he hano, etre Rama ha Bethel, e tigemere bemdez bugale Israël hag e renke ho fresezou. Doue a zelaouas c'hoaz pedennou he bobl. Euz he berz, Debora a gemennas da zont d'he c'haoud, Barak, euz Nephtali.

« Jehovah, emezhi, a ro urz deoc'h da zvel dekmil soudard e tribu Zabulon hag e tribu Nephtali, ha d'ho c'hass var menez Thabor. Var bord ar ster Sizon, e tigasso Doue deoc'h Sisara, mestr braz armeou Jabin, he girri a vrezel hag he holl zoudarded, evit ho lakaat etre ho taouarn.

— Mar teuit ganhen, me a ias, a lavaras Barak : Ma ne deuit ket, ne rinn netra. »

— Mont a rinn, eme ar brofetez ; mez en droma, n'e ket deoc'h e vazo enor ar viktor. Dre zourn eur vaquez eo e varvo Sisara. »

Gat sikour Debora, Barak a zavas eun arme a zek mil den e Zabulon hag e Nephtali hag a ias gatho var ar menez. Sisara a erruas ive beteg ar ster Sizon gat he c'huoc'h-kant kar a vrezel ha ne elfet ket lavaret pegement a zoudarded.

« Savit, Barak, a grias ar profetez ; setu goulaouet an deiz choazet gat Doue evit diskar oc'h inimied. Jehovah e unan oc'h hentcho. »

Kerkent, Barak hag he zek mil den a ziskenn gat err divar an Thabor hag a sko a gleiz hag a zeou var ho adversourien. Ar re-ma a gemer spount hag a ias a-dreñ. Ar zoudarded var varc'h a

ia ive var ho c'hiz gat ho c'hirri. Sisara e unan a lamm euz he gar hag a dec'h kuit. Barak a deas var lerc'h ho arme betek Hasoreth hag a reas kalz distruj.

Tost di, edo telt Haber, ar Sineen, gounezet da lezen Moizes ha gouskoude chommet bete neuze mignoun da roue Asor. Sisara a dec'he buhanna ma c'helle ha klask a rea eur c'horn bennak da guzet, pa velas e tont varzu enna Jahel, greg Haber.

« Deuit dindan va zelt, Aotrou, eme zhi hag e vezoc'h eb neac'h. »

— Roit d'in eur banne dour da eva. emezha en eur vont en ti; rak mervel a ran gat ar zec'hed. »

Jahel a roas leaz dezha hag e c'hourvezas da ziskuit. Teuler a reas varnha he mantel.

« Chommit e-tal an or, eme ar jeneral, ha mar teu unan bennak, c'hui a lavaro n'eus den en ti. »

Sisara a ioa skuiz maro hag a en hem roas dioc'h-tu da gousket. Jahel neuze a gemer en eun dourn eun tach braz hag en dourn all eur morzol. Tostaat a ra sioulik euz ar jeneral. Lakaat a ra dezha an tach var gostez he benn ha skei a ra varnha gat kement a nerz ma za treuz-ha-treuz beteg an douar. Sisara a dremenas evel-se, eb her gouzoud, euz ar c'houssket d'ar maro.

Neuze Barak a erru eno ive var enklask d'he enebour. « Deuit ama, a lavar dezha Jahel; me' ziskuezo deoc'h an den a glaskit. » Pa velas Sisara astennet var an douar, he benn treuzet gat eun tach, e komprenas komzou Debora e devoa lavaret e vije tennet digatha gat eur yaouez enor ar viktor.

Eur mirakl ker braz a lakaaz levenez e kaloun an holl Israelited.

Debora, ar profetez, a reas eur c'hantik kaer evit meuli Doue gallouduz Israël hag ar zoudarded kalounek o devoa kannet roue Asor.

« Tud a vrezel kalounek, o c'heus kinniget dijpot ho puez evit savetei ar bobl, meulit an Aotrou. Klevit, c'hui Rouanez; ha c'hui, prinsed, selaouit ive mad. Me, Debora, a zo e vont da gana eur c'hantik da Zoue Israël.

« Aotrou, pa edoc'h e treuzi bro Edom, an douar a grenas, an eñv a guezas e dour, menezioù ar Sinai a deuzas pa veljont ac'hanoc'h. Mez brema setu ama burzudou all. En amzer Samgar, an hentchou braz n'oant ket darempredet. Ne gerzet nemed dre ribouliou distro. Ne ziuane ket mui a dud kreñv en Israël, pa zavas souden Debora, mam ar bobl. Jehovah a ra ar brezel en eur mod nevez. Heñ e unan a bil an inimied, ep ma ve ezomm a lans nak a rondachen.

« Enor da Zabulon ha da Nephtali, d'an dud kalounek n'o deus ket bet aoun rak ar maro e tachen-nou Merome. Ar rouanez a zo deuet da ober brezel dezho; mez an eñv a ioa a-du gatho. Dour-err Sizon e deus kasset gathi ar c'horvou maro; hag ho c'hezek a dec'he ker buhan ma tistage ho c'harn dioutho.

« Benniget ra vezo Jahel, greg Haber ar Sineen! Leaz e deus roet d'an hini a c'houlenne dour; eun tach en he dourn kleiz, hag eur morzol-govel en he dourn deou, e deus treuzet he empenñ da Sisara. Sisara a guez d'an douar, mervel a ra, astennet eo eb buez. Epad an amzer-ze he vam a zell pella

ma c'hell gueleit, hag a lavar gat tristedigez : « Petra eo eta ne veler ket he garr ? Perak eo ker gourd he gezek ? »

« Ma n'eo ket distro, a lavar unan euz ar mitizien, eo abalamour ma zeo chommet da ranna ar preiz great var an inimied, ar chadennoù aour, ar guiskamantchoù pinvidik, hag ar mezer a bep liou ! »

« O Doue Israël ! ra varvo evel-se o c'holl enebourien ha ra vezo ho pugale skeduz evel an heol pa zao d'ar beure. »

Roue Asor a ioa bet goal gannet hag Israël a deuas evel-se evit an drede guech euz ar sklavaj. D'ho zro, an Israelited a en hem zavas outha hag hen diskaras. Da heul, e teuas daou-ugent vloaz peoc'h.



III.

JEDEON.

An amzer gaer a badas bete maro Debora. Mez an Israelited a ioa douget da adori idolou ar Gananeed gat an techou fall euz ho c'haloun hag ive gat ar spount o devoa rak galloud an doueou faoz-se. Setu int-hi adarre e kemmesk a bep seurt superstisionou gat relijion Jehovah. Eb-mar, oant e sonj hag e kredent e vije Doue skuiz e terc'hei varnho ha n'oant ket varched d'an taolio a skoas.

Eun niver mad a vlaveziou a ioa eat a-biou, abaoe m'en doa Moizes flastret ar Madianited a glaske miret outha da vont d'an douar promettet. Hogen ho bugale var ho lerc'h no devoa ket nebeutoc'h kassouni en ho c'haloun, ha ne glaskent nemed an dro, pe, evit lavaret guell, konje digat Doue d'en hem venji var bugale Israël. E chomm edont er meziou braz, e tu ar sao-heol da vro an Ammonited har ar Moabited. Paea a reant evit ho zikour al laeroun euz ar gouelec'h ha gatho no devoa aoun rak netra. Goude beza kannet tud Galaad ha treuzet ar Jourden, en hem skignjont dre holl vro Kanaan ha dre ma zeant ne oa nemed distruj ha lazerez. Evit savetei ho buez, an Israeli-

ted a oue red dezho en hem denna e kavarnou ar menez pe en ho c'hastellou a vrezel gat kement o doa evit ho magadurez.

Pa zeas ar Madianited kuit, e teujont er meaz euz an toullou-kuz-se, da labourat ha da ada ho douarou. Mez setu d'ar bloaz varlerc'h, pa deuas an nevez amzer, an dud-se a zistroas adarre hag a zavas ho zeltou dre ar vro, bete Gaza. Ejenned ha denved, loened a bep seurt, kement tra vad a gavent a iea gatho ha ne lezent netra da zribi gat an Israelited. Ho zorrajou denved, ejenned, kanvaled a laoskent da beuri e kreiz ar meziou evel eun arme killeien-raden. Mont a ra gatho kement tamm glazder a ioa en douar hag euz eun tribu e zeant d'eben, ken na oa rivinet ar vro a-bez. Epad seiz blavez dioc'h-tu e velas bugale Israël tud ar gouelec'h e tiroll var ho bro. Gouskoude pa velont pegen ishel int taolet ha pa zönjont c'hoaz er poaniou a zo e c'horthoz anezho en amzer da zont, e kuezont d'an daoulin dirak an Aotrou hag e c'houlennont sikour digatha a enep bugale Madian.

Doue a ioa drouk ennha e velet he vugale ken edro ha ken dizent, ha gouskoude en doa truez outho. Kass a reas eur profed da rebech dezho ho zorfed.

« Setu ama, emezha, petra a gemenn deoc'h an Aotrou : Me a meus ho tennet euz an Ejipt hag euz a dre douarn an holl boblou a roe deoc'h kement a boan da c'houzañ. Pa zoc'h deuet er vro-ma, me eo a meus kasset kuit an dud a ioa ennhie chom ha roet deoc'h ho douarou. Evit kement a vad-oberou ne meus goulennet diganeoc'h nemed eun dra. Goulen a rean ne vijec'h ket eat da zaou-

lina dirak idolou an Amorrheaned hag o c'heus va dilezet evit mont da adori an doueu faoz-se ! » Goude ar c'homzou-ze, ar profed a dec'has. Ar bobl a anaveze n'oa ket great ar rebechou-ze dezha eb abek. Ne guez ket gouskoude en dizesper. Rak pa zeo guir eo plijet gat Doue digass dezho eur profed, a n'eo ket abalamour ema var nez digass unan bennak d'ho zenna a boan ?

Hogen, eun nebeud amzer goudeze, eun den iaouank euz Ephra, a dribu Manasse a ioa e tourna he ed hag o c'he gempen en he di, gat aoun da veza gulet gat laeroun Madian. Setu e vel azezet dindan an derven dosta eun tremeniad, doareet-kaer. Dont a ra beteg ennha hag her saludi a ra dre ar c'homzou-ma :

« An aotrou a zo ganeoc'h, den kalounek dreist peb unan.

— Mar dema Doue ganeomp, a respount Jeedon, perak omp-ni goasket evel ma zomp ? Petra deu da veza ar burzudou great, ervez lavar hon tud koz, evit ho zenna euz an Ejipt ? An Doue-ze ker mad evitho en deus hon dilezet ha lakeat etre daouarn ar Madianited. »

An tremeniad a reas varnha eur zell ken douss ha ker sklear ma kredas oa dirazha unan bennak euz an eñv, dreist-holl pa glevas gatha ar c'homzou-ma :

« Kit ; me, a roio deoc'h an nerz o c'heuz ezom evit tenna Israël a dre daouarn Madian. Gouezit er-vad eo me a gass ac'hanoc'h. »

N'oa nemed Doue pe unan bennak euz he berz ag a elle komz evel-se. Jedeon en hem gave dister evit eul labour ker poaniuz ;

« Me, Aotrou, emezha ! Mont da denna Israël a dre daouarn Madian ! Va famill-me eo an disterra euz a tribu Manasse, ha me eo an diveza e ti va zad !

— Me a vezo ganeoc'h, eme an tremeniad, ha ken eaz e vezoc'h treac'h d'ar bobl-se evel n'ho peffe da c'hourin nemed oc'h eun den ebken.

— Ma meus gallet plijoud deoc'h, a lavar c'hoaz Jedeon, roit d'in eur merk bennak evit anaoud eo an Aotrou a gomz ouzin. Chommit ama eur pen-nadik ha me a zo e vont da zistrei gat ar pez a fell d'in kinnig deoc'h e sakrifiks.

— Me ho kortozo, a lavaras hen ? »

Jedeon a ieas buhan en he di hag a reas poaza eur c'havrik ha bara eb gouell. Ar c'hik a lakeas en eur baner hag an druzoni tennet euz ar c'hik en eur pod ; kass a reas anezho dindan an derven hag ho c'hinnigas d'an hini en devoa komzet outha ha ne anaie ket.

— Kemerit ar c'hik hag ar bara eb gouell, a lavar hema ; lakit-ho var ar mean ha taolit an druzoni varnho. »

Jedeon a zentas, kerkent, an tremeniad, gat penn he vaz, a douchas ouz ar c'hik hag ar bara, ha raktal, euz ar mean e savaz eur flamm-tan ag a rostas ar sakrifiks. Jedeon a ioa e vont d'an daoulin dirazha ; mez heñ a ioa tec'het kuit.

« Va Doue, va Doue ! eme Jedeon, gullet e meus eal an Aotrou dirazhon ! »

Ne ket eal Doue a gomze outha, mez Doue e unan. Mez evel ma zo ar greden e-touez an Israelited ne elle den gullet Doue nak eun eal euz an eñv eb mervel raktal, ar vouez misteriu a lavaras dezha.

« N'ho pezit ket aoun. Ne maoc'h ket e vont da vervel. Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h ! »

Tennet euz he spount, Jedeon a zavas dirak derven ar sakrifiks eun aoter ag a hanvas Aoter ar peoc'h ; hano ag a zo bet dalc'het dezhi a c'houdevez.

N'oa ket unan euz ar barnerien a ioa bet en he raok ag en dije bet eul labour ken diez da ober. Rak brema oa red distrei an Israelited varzu ho Doue hag ho zenna a sklavaj. He genvrois a ioa bet an darn vuia anezho e c'h'adori Baal. He dad zo-ken en devoa savet, da zoue faoz Ephra eun aoter, e kreiz eur c'hoat ag hen doa konsakret dezha. Evel-se, pa deuas an noz goude an diviz en doa bet gat ar personach misteriu-se, ne elle ket miret da zonjal er pez a ioa roet dezha da ober, pa glevas adarre mouez an Aotrou.

« Savit en ho sa, a lavar ar vouez. Diskarit aoter Baal savet gat ho tad ha troc'hit ar c'hoat sakr a zo en-dro dezhi. Var ar garrek, el leac'h m'oc'heus kinniget hirio da Zoue eur sakrifiks, c'hui a zavo eun aoter da Jehovah. C'hui a vernio varnhi ar skourrou deuet euz koat an idol. Var ar bern keuneud-se, c'hui a lazo eun taro euz an dibab e touez loened ho tad hag eun taro all seiz vloaz, evel pinijen da bec'hejou ar bobl. »

Gat aoun da veza goal lakeat gatan dud ma vije eat e kreiz an deiz da ober an distruj-se, Jedeon a ieas, epad an noz, gat dek den euz he di da bilat aoter Baal ha da droc'ha ar c'hoat sakr. Dioc'h ar mintin, pa velas he genvrois an distruj great, pa veljont an aoter nevez-savet hag eul loan e rosta dija varnhi e sakrifiks, e zejont e kounnar hag e

c'houlennet entrezho piou a elle beza great eun hen-velep torfed. A bouez klask, e kavchont oa Jedeon an den reuzeudik en doa great an taol. Setu ma vodont holl dirak ti Joas, hag imor ennhô :


« Digass da vap ama d'eomp, a grient a bouez-penn. Ra vezo lakeat d'ar maro an den fall en deus pilet aoter Baal ha troc'het he goat šakr. »

Joas a ioa bet sempl aoualac'h evit adori an idol ; hogen biken n'hen dije roet he vap abalamour dezha. Ne estime ket anezha aoualac'h evit kement-se.

« Piou, eme Joas, en deus roet karg deoc'h da venji Baal ? Mar d'eo Baal doue, e vezo kreñv aoualac'h evit tenna e unan venjans var an den a zo bet fall aoualac'h evit pilat he aoter. An hini a glasko gourin ouz Doue, ne velo ket, bezit sur, an deiz e tarza antronoz.

— Evel-se bezet great ! a grias an dud follet-ze. Da vap ne vezo ket great iviziken Jedeon anezha, mez Jerobaal. Rak a-vrema ne c'houlennomp evitha nemed venjans Baal. »

Guella a ioa eo ma c'hanaveze Jedeon eun Doue all ag en doa peb galloud d'hen dioual a enep gour-drouzou Baal ha drouk pedennou he genvrois.



IV.

AN TRI C'HANT DEN DISPOUNT.

DVEL er blaveziou diagent, pa deuas brao an amzer, ar Madianited, Amalesited ha poblou all ar sao-heol a dreuzas ar Jourden hag a deuaskant pemp-ha-c'hoec'h ugent mil anez-ho da lakaat ho loened da beuri e traonien Jezraël. Jedeon ho gortoze eno. Kasset en devoa kannaded dre vroiou Manasse, Aser, Zabulon ha Nephtali da glask tud a vrezel da zont da gaout ar jeneral galvet gat Doue evit stourm ouz ar Madianited. Dont a reas daou-ha-tregont mil den betek ennhô. Neuze, evit rei dezho kaloun, Jedeon a lavar dirak an holl arme : « Doue Israel, mar fell deoc'h, ervez o c'heus lavaret, savetei ar bobl dre zaouarn Jedeon, roït deomp eur merk, eur sin euz ho kalloud. Ra vezo ar c'hroc'hen danvad-ma goloet a c'hliz epad ma vezo seac'h gorn an douar tro-var-dro. » Ar c'hroc'hen oue astennet var al leur. Antronoz, mintin-mad, Jedeon a gavas ar c'hroc'hen ker gleb ma tennas anezhi eun tassad dour. El leac'h all n'oa ket an disterra glebor. « Aotrou, a lavaras neuze, na fachit ket mar pedan ac'hanoc'h da ober eur mirakl all ag a ve ar c'hountrolbeo da hema. Ra

evel ma veloc'h ac'hanon me e c'hober. Pa zounin gat an droumpill, sounit ive gat ho troumpill tro-var-dro da gamp Madian ha kriot a bouez penn : « Jehovah ha Jedeon ! »

Anter-noz oa. Edot e paouez chench goardou ; hag an arme sioul a ioa kousket-mik. Souden, var eur sin roet gat Jedeon, an tric'hant troumpill a dregern en-dro d'ar c'kamp. An Israelited a dor neuze ho fougou hag ar goulou var elum gatho en dourn kleiz, e c'hoariont gat an droumpill hag e krient a bouez-penn :

« Kleze Jehovah ha Jedeon ! »

Dihunet krenn gat an trouz eb ehan euz an troumpillou, strafillet gat an tan a velont var elum a bep-tu, ar Madianited a zonjas e zoa en dro dezho bandennajou inimied. Ar spount a grog enno ha setu hi e tec'het en eur ioual. Gouskoude an troumpillou a iea atao en-dro hag ar c'hri : « Jehovah ha Jedeon » a dregerne evel talmou kurun. Dallet gat ar spount, ar Madianited, e kreiz an denvalijen, en hem daole an eil var egile, en hem laze etrezho digerne : rak peb hini ne glaske nemed savetei he vuez e unan.

Pa zavas an deiz, traoñien Jezrael a ioa goloet a gorrout maro. Soudarded Madian a dec'h etrezek ar ster. Mez tud Manasse, Aser ha Nephtali a ia d'ho foursu ha Jedeon en devoa roet urz da dribu Ephraïm da ziuall holl treiziou ar Jourden adalek Azor bete Bethbera. Paket evel en eun toull-trap, ar Madianited a gollas en taoliad-se c'huoc'h-ugent mil den ha daou euz ar chefoz braz, Oreb ha Zeb.

Pemzek mil a ellas gouskoude treuzi ar Jourden. Zebee ha Salmana a ioa e penn an arme. Ne zale-

jont ket er vro-ze hag en hem denna a rejont bu-hanna ma ellent er gouelec'h er sao-heol da Nobe. Eno oant kampet hag e sonje dezho er-vad edont dizanjer pa velont, e kreiz eur mor a boutren, Jedeon hag he dri-c'hant den e tont da zailla varnho. Mantret ha spountet int ha buhan e kemeront an teac'h. Hogen, Jedeon a iegas var ho lerc'h. Distruja'reas ar pezh a jomme c'hoaz a zoudarded madianit ha paka'reas zo-ken an daou chef.

N'oa ket pell c'hoaz abaoe, Zebee ha Salmana a ioa bet kriz-dinatur en andret an Israelited. Breudeur da Jedeon n'oa ket distroet d'ar gear hag e lavaret oant bet lazet dre urz an daou brins-ma. Jedeon a fell dezha gouzoud ar virionez hag a c'houlen digatho :

« Lazet oc'heus Israelited var menez Thabor, oc'h piou oant-hi henvel ? »

— Ouzoc'h, a respountas an daou brizounier ; ha peb hini anezho a elje beza tremenet evit map eur Roue.

— Va breudeur oant, eme Jedeon. Mad : me a gemer brema Doue da dest : Me mije saveteat ho puez ma o pije bet espernet ho buez d'am breudeur. Va map, emezha en eur drei varzu Sether he vap hena, kemer da gleze ha sko var ar vuntrerien fal-lagr-ma. »

Mez Sether a ioa gourd da zevel he gleze a enep daou brins euz Madian.

« Skoit oc'h unan, a leverjont-hi neuze : Red eo eun den kreñv evel doc'h evit ober seurt taoliou. »

Eur moment goudeze, e kuezent o daou dindan kleze Jedeon. Ar bobl a Israel dre anaoudegez vad


hag evit diouall guelloc'h ar vro a enep an inimied a fellas dezha lakaat Jedeon da roue.

« Bezit roue ganeomp, a lavaras an Israelited, c'hui, ho map var ho lerc'h ha goudeze bugale ho pugale. Rak hon tennet o c'heus a dre daouarn ar Madianited. »

« Salokrass, a respount gat furnez an den kalounek-se; me ne vezin ket roue varnoc'h, na va map, na va bugale vihan. Ho roue eo Jehovah. »

Ne c'houlennas digatho evit he lod hag evit he boan nemed ar chadennoù aour a zouge ar rouanez en-dro d'ho gouzouk, ho zaeou pinvidik hag ar mezer fin a ioa en ho guiskamantchou. Gat an traou-ze, e lakeas ober eun Ephod, da lavaret eo, eur guiskamant evit ar belek braz. An Ephod-ze a jommas en Ephra, evit derc'hel sonj euz an traou burzuduz great gat Jedeon.

Madian a ioa diskaret. Epad ar daou-ugent vloaz ma chommas Jedeon da c'houarn Israel, ne oue ket an disterra trouz brezel. An den dispar-ma, enoret gat an holl evel salver he bobl, a vevas koz. Lezer a reas var he lerc'h eur famill niveruz. He vugale a ziskennas he gorr e bez Joas, he dad, en Ephra. Eno oa ganet.



V.

GOESTL JEFTE.

AVEAC'HO devoa diskennet er bez an den burzuduz-se en doa savet a-nevez ar guir religion en ho zoues, ma zeas adarre an Israelited da zaoulina dirak Baal. Sêvel a rejont dezha aoteriou hag an Ephod roet gat Jedeon da veleik braz Jehovah a oue guisket gatho da veleien ar falz-doue. E leac'h espern ha diouall bugale ho mad-oberour, a pa na vije nemed dre anaoudegez-vad, e lezchont ho lez-vreur Abimelek d'ho lakaat d'ar maro.

He dad Jedeon a ioa euz a dribu Manasse; he vam a ioa eus Sichem, tribu Epbraïm, tud a fouge. Evel ma zoa savet trouz etre an diou dribu ma, Abimelek a c'hoanteas lakaat var he benn ar gu-runen a roue, reuzet gat he dad evitha e unan hag evit he vugale.

Kement a reas ma oue kemeret da roue gat he gerent a Zichem, hag evit ne deuio hini euz he vreu-deur da glask hen diskar divar he dron, e reas ho lakaat holl d'ar maro. Unan ebken a ellas te-c'het, Joatham, ar iaouanka euz ar vugale.

Eur pennad amzer goude, epad ma krede an holl

oa maro, ar c'heaz reuzeudik-se a apparissas var menez Garizim da dud Sichem hag a zispakas dirazho en eur barabolen ar poaniou a ioa e vont da ziroll varnho ha var Abimelek.

« Eun deiz, emezha, ar guez euz ar c'hoat a fellas dezho kaout eur roue. Pedi a rejont ar vezen olivet da ren varnho. — Nan; ne ellan ket, a lavar ar vezen-ze, evit beza ho roue, dilezer va eol a ra joa hag eürusdet an dud hag an doueou. »

Neuze oue kinniget ar gurunen d'ar vezen fiez. « Nan, a lavar houma, ne ellan ket dilezer va frouez ken douss evit mont d'ho kouarn. »

Mont a reont neuze da gaout ar vinien : « Nan, nan, eme ar vinien; ne ellan ket dilezer va bloka-jou rezin ha va guin, evit mont ganeoc'h. »

Abalafin, ar guez inouet, a ginnigas d'ar strouez, d'ar spern, beza roue varnho. Ne oue ket red pedi diou vech. Mall oa gat ar spern beza roue. « C'hui, emezha, a deui da zisheolia dindan-hon. Mez mar tiouez deoc'h dizenti eur vech bennak ouzin, me a laosko varnoc'h eun tan ag a zêvo bete sedr al Liban.

« Tud Sichem, eme Joatham goudeze, c'hui o c'heus lazet bugale Jedeon, c'hui a zo e sikour hag e servicha an hini en deus lazet he vreudeur : mad, Abimelek a vezo evidoc'h eun tan bêro hag euz a Sichem e savo eur flamm ag a rosto oc'h Abimelek. »

Ne zaleas ket da erruont ar pezh en doa lavaret. Epad tri bloaz, Abimelek oue ker kriz ma savas he bobl en he enep. Mez heñ, evel eul leon kounnaret, a zalc'has penn ouz an dud revoltet, ho c'hannas aliez, a zegas dezho meur a geriaden hag a deuas

erfin da glask kemeret Thebez, a ioa ive en he enep. Eno edo dourn Doue hag he venjans e c'hortoz anezha. An dud a ioa en hem zastumet en eur c'hastel huel hag ac'hano e taolent a bep seurt traou var he zoudarded. Abimelek, drouk ennh, a ia bete dor ar c'hastell hag a glask lakaat an tanenhi. Mez divar ar voger, eur c'hreg a vel he labour, a daol varnha eun tamm mean milin hag a vrüzun dezha he benn.

Ar brezel diskiant-ze etre tud euz ar memez bro, ag a reas skuilla kement a c'hoad, ne gonvertissas ket ar bobl a Israël. Jehovah, pa vel pegen dal int, a laosk anezho etre daouarn an Ammonited. Arrema, e douk trivec'h vloaz, en daou du d'ar ster, a reas distruj ed-a-ed ar vro. Goal gasset evel ma zoa, e teuas neuze sonj da Israël euz Jehovah.

« Pec'het or beus en oc'h enep, a lavarent-hi gat daëlou, dilezet on beus hon Doue evit adori doueou faoz.

— Aliez a vech, a respount an Aotrou, e meus ho tennet a boan ha bep tro o c'heus troet keind'in evit mont da heul an doueou faoz. Hirio eta n'ho sikourin ket. Kit da gaout ho toueou ha lavarit dezho ho telivra.

— Guir eo, emezho, pec'het or beus ha pec'het braz. Skoit varnomp; hogen tennit ac'hanomp a dre daouarn an Ammonited. »

Evit diskuez da Zoue e troent a-grenn varzu ennh, e taoljont er meaz euz ar vro kement doue faoz a ioa ha sevel a rejont a-nevez relijion ar guir Doue. Doue a gemeras truez outho hag a roas dezho esperans evit divezatoc'h.

Pa zistroas an nevez amzer, e klevchet adarre

iouadennou gouez. An Ammonited a ioa distroet da rivina tribu Galaad. Ar pennoù braz euz an tribu a lavaras var eur vouez e ranket mont da attaki an Ammonited hag e zoa red lakaat e penn an arme an Israelit a vije kalounek aoualac'h evit sailla varnho. Hogen, d'ar mare-ze, e veve e Galaad eun den a vrezel eb he bar; he hano Jefte. He vreudeur o doa kasset anezha euz a di he dad var digarez ma zoa bastard. En hem denna'reas var bord douarou ar Syrii. Eno gat tud divroed, gat galouperien bro e savas eun arme hag ober a reas gat an dud-se taoliou brezel ken estounuz ma oue kinniget dezha gat an holl kundui ar brezel a nep an Ammonited.

« C'hui, eme Jefte, o c'heus lezet va c'hass kuit euz a di va zad, ha brema hem galvit abalamour o c'heus izom ac'hanon !

— Goulen a reomp diganeoc'h, emezho, ma teuoc'h ganeomp da stourm ouz bugale Ammon hag e vezoc'h ar mestr var kement hini a zo e Galaad.

— Mar dan d'ho sikour ha mar bezan treac'h da vugale Ammon, c'hui a lakai ac'hanon davestr ?

— Hen toui a reomp dirak Doue ! »

Var gement-se, Jefte a ieas assamez gatho bete Masphat. Eno oue lakeat da jeneral gat an holl, var eur vouez. Kerkent e kassas kannaded da roue Ammon evit goulen digatha piou a roe guir dezha da lakaat he dreid ha da ober distruj var douarou Israel.

« Pa deuas ho tadou euz an Ejipt, a respountas roue Ammon, e kemerjont evitho hor bro-ni adalek an Arnon beteg ar Jourden. Restaolit d'eomp ar pezh azo d'eomp ha me rei ar peoc'h. »

Jefte a respountas evel-hen d'ar c'homzou divergont-se :

« Morse Israël n'hen deus kemeret eur bastel euz douarou Moab pe Ammon. Pa zint tec'het euz an Ejipt, ha goude beza treuzet ar mor ruz, hon tadou koz a erruas e Kades, hag a deuas, ed-a-ed da vroiou Edom ha Moab, da gampi en tu-all d'ar ster Arnon. Eno roue an Amorrhean, Sehon, a fellas dezha ho c'hanna. Jehovah ho lakeas, heñ hag he arme e galloud Israel. Setu penaoz oamp deuet da veza mistri euz an holl vro, etre an Arnon hag ar Jourden.

« Jehovah en deus pilet an Amorrhean evit rei d'eomp he vro ha c'hui a fell deoc'h he zenna diganeomp evel pa ve deoc'h ! Ar pezh a zo d'ho toue Kamos a zo deoc'h dre vir. Mez ive, ar pezh en deus gounezet evidomp hon Doue a zo dre vir d'eomp. Tri-c'hant vloaz a zo e maoump er vro-ma. Daoust ag ar Moabited a zo bet morse e klask trabas ouzomp ? A c'hui, bugale Ammon, petra eo deoc'h beza chommet tri-c'hant vloaz eb goulen ar pezh a zonjit dleet deoc'h ? Ne ket ni eo a zo bet displeal, mez c'hui; hag ouspenn-zo; an Doue a gemeran ama evit hor barn a ziskuezo gat piou ema ar justiss, ganeoc'h pe ganeomp-ni. »

Evel ma c'hellit kredi, roue an Ammonited ne reas van evit klevet ar seurt komzou-ze hag oue red ober brezel. Spered Doue a ioa gat Jefte. Ober ara eun droiad dre teir tribu Galaad evit sevel soudarded hag e zeas goudeze varzu bro an inimied. D'an ampoent m'edo e vont var ho douar, Jefte, leun a galoun a reas ar voestl-ma : « Aotrou, ma roit d'in ar gounid, kenta hini a deui er meaz euz

va zi d'am diambrouk a vezo kinniget deoc'h e sakrifis. »

Jehovah her greas treac'h d'an Ammonited. Ho zoudarded a oue kannet, ugent euz ho c'heriou dismantret hag ar chefou great dezho plega ho fenn dirak Israel. Jefte a ioa laouen e tistrei varzu Masphat. Mez ar brud euz he viktor a ioa redet en he raok. Guelet a reas e tont varzu ennha eun toullad merc'hed iaouank, muzikou gatho hag en eurgana he vleulediou. E penn ar vanden edo he verc'h ha n'en doa nemethi. Kerkent a ma he guelas, e rogas he zillad hag e lavaras gat glac'har : « O va merc'hik paour, pebez distro fall evidoc'h hag evidon-me ! Eur voestl a meus great d'an Aotrou hag ar voestl-se a rankan da zeveni. »

« O va zad, a respountas ar plac'h iaouank dispar-ze, an Aotrou en deus roet deoc'h ar viktor var an inimied. Red eo derc'hel d'ar pezh o c'heus prometted. Setu me prest. Roit d'in ebken daou viz evit mont gat eun nebeud mignounezad var an du-chen da ouela var va iaouankiz ker buhan tremenet. »

Da benn an daou viz, plac'hik Israel a ziskennas euz ar menez, hag evit seveni he voestl, Jefte a ginnigas anezhi e sakrifis da Zoue. Evit derc'hel ar zonzj euz ar pezh e devoa great ar plac'h kalounekse, e teu bep bloaz merc'hed iaouank Israël epad pevar dervez da ouela assamez var merc'h Jefte. An tad a vebas c'hoaz c'huec'h vloas e penn bro Israël hag a varvas enoret gat he holl genvroiz. Sebeliet oue en he gear, Galaad.





VI.

SAMSON.

AN tri varner a deuas var-lerc'h oa Abesan euz Bethleem, Aialon euz Zabulon hag Abdon euz Faraton. Epad ar pemp bloaz var'n ugent ma ouent e c'houarn Israël, ar bobl a zalc'has mad da lezen Jehovah. Mez dont a reas a nebeudou da laoskaat ha d'en hem drei adarre varzu an doueou faoz. En dro-ma, Doue ho zaolas etre daouarn ar Filistined.

Ar re-ma deuet euz an Ejipt a ioa deuet da veza mistri var ar broiou kaer ha pinvidik euz an douar promettet, a zo ed-a-ed ar mor braz. Pemp loden o doa great euz ar vro : Gaza, Azoth, Ascalon, Geth hag Akaron. Pep hini anezho e devoa he frins. Pep hini a ioa mestr en he garter ha nikun n'en devoa da velet var ar re all. Hogen ne reant nemed unan pa vije red klask ho interest. Ar re-ze eo a oue choazet gat Doue evit kastiza he vugale dizent.

Ar Filistined ne reant ket evel an dud all divardro. Ar re-ma pa vijent treac'h d'an Israelited a rea distruj e pep leac'h. Mez ar Filistined ne reant nemed lakaat varnho a bep seurt kargou. Evit

chomm mistri dezho e kemerjont ho c'hastellou hag an holl armou a ioa etre daouarn ho zoudarded. Difenn a rejont zo-ken d'an Israelited kement mi-cher a renket implija ennha houarn pe zir; ha pa ranket kaout eun alar, pe, zo-ken, lemma soc'h an alar, oa red mont da gaout ar Filistined. Israël n'oa ket bet bete neuze en eur stuz ken digonfort. Ar reuziou-ze a badas daou-ugent vloaz. Gouskoude evit miret na guezio Israel en dizesper, hag evit diskuez d'ar Filistined peger bras eo he c'halloud, Doue a zigassas eun den dispar da rekour Israël.

D'ar poent-se, e veve e Saraa, tribu Dan, eun den hanvet Manue ag a ioa dimezet da eur c'hreg a ne zouge ket bugale. An daou bried-se, mignoun da Jehovah, a en hem jale, abalamour oa eun dis- megans neuze beza dizher. Hogen, eun devez, eal Doue a apparissas d'ar c'hreg hag a lavaras dezhi :

« Beteg-hen n'o c'heus ket bet a vugale. Hogen a benn nebeud c'hui a gonsavo hag a lakai er bed eur bugel. Ar bugel-ze a gonsakrot da Zoue dre voestl, evel Nazarean. Bemdez epad he vuez, e viro da eva guin nak evaj all ag a elfe mezvi. Ne zrebo morse euz ar c'hik difennet ouz an Nazareeth. Bi- ken an aoten ne dremenno var he benn. — C'hui ive oc'h unan, galvet da vuez he vamm, diouallit da zribi ha da eva ar pezh a zo difennet d'ho map. Gue- zit er-vad eo heñ a dle beza euz ar re genta e re- kour Israël. »

Ar c'hreg-se, strafillet-holl, a zo mall gathi lava- ret d'he goaz e zeus bet eun den a berz Doue, kaer evel eun eal, e lavaret dezhi e dije eur map, e vije ar map-se voestlet da Zoue kerkent ganet hag e vije bet euz ar re genta e savetei Israël. Goulennet

e devoa digat an aotrou-ze piou oa, euz a be-leac'h e teue. Hogen n'oa ket plijet gatha lavaret.

Manue a gredas d'ar bromessa great; mez c'ho- ant en doa da c'houzoud penaoz sevel ar c'hrouadur- ze, petra da ober evit lakaat anezha e stad da ober Doue aotrou Doue. Setu perak e pedas an bolontez an Aotrou Doue. Setu perak e pedas an Aotrou da zigass dezha adarre kannad euz an eñv. Doue a zelaouas he beden. Eun deiz, epad m'edo he c'hreg er park, an eal a apparissas adarre dezhi. Houma a ias d'ar red da glask he goaz hag e teul- jont o daou assamez el leac'h ma edo an eal.

« Aotrou, a lavaras Manue, a c'hui eo an hini a zo bet, n'euz ket pell abaoue, e komz ouz va fried ? » — Ia, da ! me eo.

— Da be vare e seveno ho promessaou, petra ranko ar c'hrouadur da ober ha petra ranko chomm eb ober ?

— Ne evo na guin, nak evaj ag a elfe mezvi ; ne zrebo ket euz ar c'hik a zo difennet d'an Naza- reeth, ervez a meus lavaret d'ho kreg.

— Den Doue, a lavar Manue, plijet ganeoc'h ober d'in an enor da gemeret ho lod er c'havrik e maoup e vont da boazat evit hor pred.

— Nan, a respount an tremeniad : ne bedit ket ac'hanon da breja ganeoc'h. Mez, mar kirit, kin- nigit eur sakrifik d'an Aotrou.

— C'hui, pe hano o c'heus, a c'houlennas Ma- nue ? Pa vezo sevenet ar pezh o c'heus lavaret, piou a rankimp da drugarekaat ?


— Na c'houlennit ket diganhen va hano. Rak ker braz eo ma roffe deoc'h spount hag enkreiz. »

Manue a ias diere d'ar gear. Kemeret a reas eur c'havrik, he lakaat a reas var an aoter evit beza

kinniget da Zoue. Souden, epad m'edo he c'hreg hag hen ec'h evessaat petra vije diouezet, e savas eur flamm-tan euz an aoter varzu an eñv. Eal Doue a zavas en ear gat ar flamm ha n'her gueljont mui.

Neuze e veljont sklear oa bet dirazho eun eal bennak euz an eñv. Manue a zonje dezha edo e vont da vervel. Rak an holl Israelited o devoa ar greden ne c'helle den chomm beo goude beza guelet Doue pe unan bennak euz an elez. Mez, evel a lavaras he c'hreg dezha, ma vije bet sonj an Aotrou e vijent marvet raktal, n'hen dije ket great dezho promesaou ker kaer.

Diouezout a reas ar pezh en doa lavaret an eal. Greg Manue e devoe eur map, hanvet Samson, da lavaret eo, kreñv. An hano-ze a verke an nerz a dlle da gaout hag hen devoe zo-ken abred, dreist an holl dud euz he amzer. Spered Doue a ziskennas ive varnha hag a roas dezha da anaout e chommo he nerz gatha epad ma vezo mignoun da Zoue ha ma viro ar voestl a Nazarean. An nerz-se a zo roet dezha a enep ar Filistined. Setu perak, kerkent a ma zeo deuet d'an oad a ugent vloaz, n'eus ken frouden en he benn nemed defot mont e touez ar Filistined d'ho diskañ muia ma c'hello ha da rei dre he daoliou-kaer nerz kaloun d'he genvroiz.



VII.

GOURINER JEHOVAH,

PETRA bennak ma zoa an Israelited e sklavaj dindan ar Filistined, ne vevent ket goudekoude evel inimiad en ho zoues. Setu perak Samson a ellas dimezi da eur Filistinez iaouank euz Thamnata. Pa deuas da c'houlenn konje digat he dad, hema ne vankas ket da lavaret dezha :

« A n'eus ket aoualc'h a verc'hed iaouank en Israël, ma rankit mont da glask eur pried e touds an dud estren-ze ? »

— Va zad, a lavar Samson, houma a blij d'in. Plijet ganeoc'h he c'hemeret evit ho merc'h ! »

An tad hag ar vam, a reas konje d'ho map hag a ias assamez gatha d'ar veladen, da c'houlenn ar verc'h evit ho map. Tostik dija da gear, epad m'edont e treuzi eur parkad guiniennou, Samson a velas soudenn e lammet varzu ennha, e kounnar, eul leon iaouank. N'hen devoa na kleze na baz. Hogen spered Doue a roe dezha nerz. Lammet a ra d'al loan gouez-se hag her lakaat a reas a bastellou evel m'hen dije great da eur c'havrik-nevez ganet. Goudeze e za buhan da gaout he dad hag he vam

o devoa poursuet atao ho hent ; ha ne lavaras ger dezho euz ar pez a ioa c'hoarvezet.

Kerent ar plac'h iaouank a reas dezho digemer mad. Setu ma tistroas Samson nebeud derveziou goudeze da gear Thamnata evit he eureud. En eur vont di, e c'hoanteas gueleit c'hoaz korv al leon en doa lazet. Peger mantret n'oue ket pa gavas en he c'hinou eun hed guenan hag eur follen-vel euz an doussa. Rei a reas da dañva d'he gerent, mez eb lavaret dezho a be-leach'e teue. Rak sevel a reas en he spered eur zonz ag a fell dezha derc'hel kuzet.

Tregont den iaouank, euz ar Filistined pinvidik a jommas assamez gatha epad seiz dervez. Hogen, epad ar pred, Samson ervez kustum ar vro, a roas dezho eun divinadel.

« Mar gellit, emezha, epad ar seiz dervez fest-ma, divin d'in-me va divinadel, me a roio deoc'h tregont mantel ha kement all a zaeou. Mez ma ne ellit ket dont a-benn da zivinout c'hui a roio d'in-me kement-all.

— Mad-sur, emezho ; guelomp ho tvinadel.

— Setu-hi ama : Euz al lounker eo deuet ar bevans, hag euz ar c'hreñv an dousder. »

An hini ne ouie ket istor ar mel hag al leon, ne dale ket ar boan dezha klask. Evel-se, epad tri dervez dioc'h-tu, kaer o doa, ar botred iaouank ne gavent netra. Neuze e lavaront da c'hreg Samson :

« Red eo, emezho, tenna he zekret digat ho koaz, kousto pe gousto, pe ni a lakai an tan oual var di ho tad. Ne vez ket pedet an dud d'an eureud evit beza laeret. »

Ar c'hreg iaouank a rea kement a elle, lenva, pedi a rea. Samson a zalc'he mad. Evel ma rebeche he c'hreg dezha n'hen doa ket aoualac'h a fizians ennhi, Samson a respountas en doa kuzet he zekret memez oc'h he dad hag he vam. Gouskoude d'ar seizved dervez, skuiz gat he hirvoudou, oue simpl aoualac'h evit lavaret he zekret. Mall oue gathi mont d'he gass d'an dud iaouank hag ar rema, d'an abardaez, nebeud araok kuz-heol a deu da gaout Samson hag a lavar dezha var eun ton goaperez :

« Petra'zo doussoc'h eget ar mel, ha kreñvoc'h eget al leon ?

— Divinet o c'heus, eme Samson drouk ennha ; mez paneffe va greg-me e vije'h bet c'hoaz e klask. »

Raktal, pouezet gat spered Doue, e kerz bete Askalon. Eno e lazas tregont Filistin, hag e tigasas ho zaeou hag ho mantellou d'an tregont den iaouank trubard. Goudeze e tristroaz da di he dad. Digasset oue dezha ar c'helou oa dimezet he c'hreg da unan euz an dud iaouank a ioa bet er fest. Adalek neuze n'oa ken sonj en he benn, nemed d'en hem venji.

Deuet oa amzer an eost. Samson epad meur a zervez a i eas da baka lern a ioa e-leiz anezho dre ar vro. P'hen devoue tri c'hant anezho, ho stagas daou ha daou divar bouez ho lost ha goude beza staget eun torchad tan oc'h ho lost e laoskas anezho e meziou ar Filistined. E nebeud amzer, an ed a ioa en he za hag an ed a ioa var he zram, ar guiniennou hag ar guez olivez a oue distrujet.

An holl a grede n'en doa Samson great an taol-

ze nemed evit en hem venji var he dad kaer hag he bried. Setu hi a laka an tan varnho hag an tad a oue rostet gat he holl famill. Sonjal a rea dezho o dije evel-se torret imor Samson. Mez hema a lavaras dezho ne vijent ket kuitez gat ken nebeud-se. Kement ha kement a zrouk a reas dezho, ma teujont gat eun arme var douar Juda. Kampi a rejont e kichen Leki.

« Petra eo deoc'h dont var hon douarou-ni, a lavaras tud Juda d'ar Filistined ? »

— Ni, eme ar re-ma, a fell deomp kaout Samson, ha pa vezimp krog mad ennha, ober dezha kement a zrouk evel hen deus great d'eomp. »

Gat aoun razho, tud Juda oue digaloun aoualac'h evit guerza dezho ar gouriner dispar-ze.

Dont a reas, evit-se, tri mil den euz an tribu da gavargn Etam. Eno edo dindan guz.

« Gouzoud a rit er-vad, emezho, e zeo ar Filistined mistri d'eomp. Perak eta e lakit anezho da gounnari dre an drouk a rit dezho ? »

— Me, eme Samson, n'e meus great nemed en hem venji euz an dismegans o deus great d'in.

— Petra' ra kement-se d'eomp-ni, emezho, ni a ia d'ho staga ha d'ho kass d'ar Filistined. »

Evit ne vezo ket tamallet he genvroiz, Samson en hem roas dezho.

« Liammit ac'hanon, emezha ; mez touit d'in ne glaskoc'h ket tenna va buez diganhen.

— Hen toui a reomp, emezho. »

Staget oue gat kerdin nevez ha tennet euz he gavargn evit mont dirak he inimied. Ar Filistined a zirollas a vandennou evit paka ho adversour. Ioual ha krial a reant gat ar joa. Mez, souden, ar

prizounier a dorr he liammou ker buhan a ma vez devet eun tam plouz gat an tan ; pega'ra en eur javed azen, sailla' ra gathi var he enebourien sabbatuet ; skei a ra a gleiz hag a zeou ken ma jommas mil den var an dachen.

Goude ar viktor-ze, e taolas he javed d'an douar hag e c'hanvas al leac'h-se : « Sao ar Javed. » Epad an abaden Samson ne zonje nag en dribi nak en eva. Mez kerkent a m'eo echu an abaden, e venne kuezha gat an naoun hag ar zec'hed : « Aotrou, emezha neuze, deoc'h oun dleour euz va buez hag euz va gounid. Mez ma ne deuit ket d'am zikour em dienez, e rankin kuezha etre daouarn an dud fall-ma. »

Kerkent, dindan dourn holl-gallouduz Jehovah, eur garrek a fraillas hag e tarzas anezhi eun dour sklear evit freskaat ha kennerzi Samson e kreiz he skuizder. Adalek an deiz-se, al leac'h-se oue hanvet feunteun ar beden.





VIII.

DALILA.

DOUDE an taoliou kaer-ze ar bobl a Israël a gemeras anezha evit ho barner. Guelet a rea sklear e teue a-berz Doue. Kalz vad a reas d'an Israelited. Epad an ugent vloaz ma oa bet ho barner, ar Filistined n'oant ket ker rust outha. Acoun o doa da zihuna leon Israël. Mez, siouaz ! leon Israël en devoa eun tech fall ag a bilas anezha.

Eun deiz edo e Gaza, kear vrasa rouantelez ar Filistined. Diskenn a reas e ti eur vaouez fall evit tremen an noz. (Ar seurt merc'hed-se a ioa ostaliri gatho pervuia.) Houma a ioa mall gathi embann dre gear edo Samson en he zi, Samson an den ker brudet.

Kerkent, eun niver braz a dud a deuas en dro d'he zi. Goardou a ioa lakeat evit diouall doriou kear. E douk an noz peb hini a jommas var zao, sioul, evit paka Samson hag he laza didruez kerkent a ma vije deuet er meaz euz an ti.

Hogen, epad m'edont gourvezet ha kousket da c'hortoz goulou-deiz, Samson a ieas er meaz e

kreiz an noz ha den ne gredas miret outha. Pa eruas gat doriou kear, e tivarc'has anezho, ho zammas var he skoaz hag ho dougas bete kern ar me-nez, dirak Hebron.

Mez ar Filistined a anaveze he dech fall hag a en hem lakeas da studia he droiou kam. C'hoant o devoa da c'houzoud petra a lakea anezha da veza ker kreñv, er memez fessoun m'ho devoa laeret varnha he zivinadel. Lavaret oue dezho e zea aliez da draoñien Sorek, da di eur vaouez hanvet Dalila. Ar Filistined a reas pep tra evit gounid ar vaouez-se.

« Red eo deoc'h, emezho, lakaat an den-ze da lavaret deoc'h e pe-leac'h ema he nerz, ha penaoz e c'hellimp dont a-benn anezha. Mar grit kement-se, nia roio deoc'h unnek-kant sikl arc'hant. (Vardro c'huec'h kant skoet.)

Ar Filistinez ne c'houlenne ket vell. Kenta ma en hem gavas gat Samson, e c'houlennas digatha evel en eur fessoun dievez e pe-leac'h edo he nerz hag e lavaras dezha evel divar faë :

« A kaout a elfet kerdin kreñv aoualac'h evit oc'h erei eb ma ouffec'h ho zerri ?

— Ia, zur ; eme Samson ; seiz korden great gat kalken-ejen, gleb c'hoaz, a zo aoualac'h evit va staga ha va dinerzi a eneb an holl. »

Dalila a reas digass dezhi kerdin evit liamma Samson. Ar Filistined a ioa kuñet en eur gampr e-kichen. Liamma a reas Samson epad he gousk ha goudeze e lavaras dezha gat prez : « Samson, ar Filistined a zo ama ! » Kerkent e torras he liammou ker buhan a ma vez deuet eun tamm stoup gat eur flamm-tan,

Dalila a ioa drouk-ennhi, abalamour oa bet, var he meno, goapeat gat Samson. Lavaret a ra dezha : « N'euz ket pell c'hoaz o c'heus lavaret geier d'in. Lavarit hirio da vihana, me ho ped, ped korden a ve red da gaoud evit ho terc'hel eb finval ?

— Seiz korden nevez, eme Samson, a ne vezint ket bet morse en implij a lakai ac'hanon dinerz evel n'euz forz piou. »

Dalila a brenas seiz korden nevez ha goude-beza ho stardet guella ma c'helle en dro da Samson e krias a bouez-penn : « Samson, emä amä ar Filistined ! » Kerkent e torras ar c'herdin evel m'hen dije torret eur guiad-kinid.

Gouskoude Dalila a zalc'he mad atao hag a reas an neuz da gaout kalz glac'har.

« Epad pegeit amzer, emezhi, e kountoc'h d'in-me istoriou. Lavarit d'in, me ho ped, penaoz e c'halfet ho liamma ?

— Evit va miret da dec'het, emezha, e ve red ober seiz pouchad euz va bleo, ho blansouni mesk ha mesk gat neud hag ho staga gat eun tach-marc'h var ar zolier. »

Dalila a stagas er fessoun-ze Samson ouz ar zolier hag hen dihunus en eur grial a-bouez penn : « Samson ! ar Filistined ! »

Samson ne reas nemed trei he benn, hag a denas gatha dioc'h-tu an tach, an neud hag he vleo.

Dalila a ias neuze en egar. « Penaoz, emezhi, e c'hellit-hu lavaret d'in-me e zoc'h mignoun d'in ? Ho kaloun evidon a zo ien, ha setu ama teir guech dioc'h-tu o c'heus great goap ac'hanon. »

Ne baoueze da lenva, da bedi, da hirvoudi. Ne leze ket gat Samson eur moment ehan.

Ar paour kez Samson a stourmas outhi epad meur a zervez ; mez, abalafin, oue simpl aoualac'h evit selaou komzou flour ar plac'h fall-ze.

« Me, emezha, a zo Nazarean, da lavaret eo kon-sakret da Zoue adalek ma zoun ganet. Morse an aoten n'eo tremenet var va fenn. Ma ve trouc'het d'in va bleo, e zaffe kerkent va nerz diganhen hag e venn henvel ouz an dud all. »

Kerkent a m'he deus kavet an dalc'h, Dalila a lavar d'ar Filistined dont a vanden d'he zi. Edo e tro da verza dezho Samson. Ar re-ma a deuas a vanden hag arc'hant gatho evit paea Dalila. Hou-ma, epad ma edo kousket mad Samson a ias beteg ennan hag a drouc'has ar pouchadou bleo a rea he nerz. « Samson, emezhi, prest goude, setu ar Filistined e tont varnoud ! »

Samson a zihunas en eun taol-kount Sonjal a rea dezha en dije gellet en hem denna a brez, evel ma hen doa great diaraok. Mez n'oa ket mui Doue a-du gatha. Dinerz eo. Ne c'hell ket en hem ziouall ouz he inimied, hag ar re-ma a grenvas dezha he zaoulagad.

Goude beza her lakeat er stad truezuz-se, ar Filistined a gassas anezha karget a jadennou da gear Gaza. Eno oue prizouniet ha lakeat da ober labourou tenn evel an disterra euz ar sklaved. Samson a c'houzanvas eb klemm abalamour ma teue da zonz dezha euz ar pec'hejou en doa great a enep an Aotrou, he Zoue.

Astennet oa he vleo d'ar mare ma zeas cheffou ar Filistined da ginnig eur sakrifs d'ho doue Dagon. Rak ennez, var ho meno, en doa ho delivret dioc'h Samson, ho enebour touet. Ar bobl a deuas

ive d'ho heul evit trugarekaat an doue-ze da veza bet treac'h d'an hini a rea kement a zistruj var an ed ha var an dud.

Goude ar sakrifik, oue eur friko braz. Ar vistria ioa ker laouen ma rojont urz da gerc'het ar gouriner braz evit hen diskuez d'ar bobl. Tennet eo euz he brizoun ha digasset da zal ar pred, bleinet gat eur c'hrouadur iaouank. Ouspen tri mil den a ioa eno, prinsed, goazed, merc'hed a rea goap euz ar c'heaz dall.

« Va mabik, a lavar Samson, kassit ac'hanon da ziskuiza eun tamik, harpet ouz pilierou an templ. »

Ar bugel a gassas an den dall betek ar pilierou hag hen harpas outho.

« Aotrou, va Doue, a lavar neuze Samson, me ho ped, bezit sonj ac'hanon brema ha roit d'in evit eur pennadik ebken va nerz guech-all. En eun taol, me en hem venjo var an dud kriz-ma o deus krenvet d'in va daoulagad. »

Gat he zaou zourn, e krog en daou bilier a zo harpet varnho an templ hag e lavar :

« Mervel a ran laouen, mez assamez gat ar Filistined. »

En eur gomz evel-se e c'hejas an daou bilier hag an ti a guezas en he boull var ar bobl ha var ar brinsed. Setu penaoz e varvas gouriner braz Israël hag en eur vervel e lazaz muioc'h c'hoaz a dud eget n'hen devoa great epad he vuez. He vreudeur hag an dud euz he famill a dennas he gorr a douez atrejou an templ hag hen diskennas etre Saraa hag Esthaol e bez he dad, Manue.



IX.

SAMUEL.

DAOU vloaz goude maro Samson, epad m'edo Heli belek braz ha barner en Israël e veve var menez Ephraïm eur guir vignoun da Zoue, hanvet Elcana. Guelet e vije bep bloaz evit goueliou braz Pask, Pantekost hag an Tabernaklou, e pignat euz a Ramatha, he vro, bete kear Silo, evit kinnig eur sakrifik da Zoue an armeou.

Hogen he c'hreg ne doa ket a vugale ha ne rea nemed en hem jala. Elcana a lavare dezhi aliez : « Perak kement ouela ha tremen ho puez en dristidigez ? Daoust a va c'harantez-me ne dal ket evidoc'h eur bodad bugale ? » Kaer en doa lavaret, Anna a ouele atao. Eur vech e zeas da Silo assamez gat he fried. Mont a reas e unan dirak an or dianveaz an tabernakl, e kichen al leac'h ma edo Heli e varn ar bobl. Eno e lavar da Zoue ar c'hoant braz e doa en he c'haloun.

« Doue an armeou, emezhi dre he daelou, mar plij ganeoc'h sellet a druez ouz eur c'hreg glac'har et ha rei d'in eur map, me her c'honsakro deoc'h

da viken dre an Nazareat. Birviken aoten na dostai euz he benn. »

Pell amzer e chommas da bedi. Ar beleg braz a vele he muzellou e vont en-dro : mez ne entente ket eur ger gathi ; sonjal a reas zo-ken oa mezo ha pedi a reas anezhi da vont er meaz gat he c'horvad.

« Aotrou, a lavaras Anna dezha, fazia a rit var va c'hount-me. Me ne meus ket kemeret an distera evaj. Me a zo eur paour keaz maouez glac'haret, deuet da bedi dirak an Aotrou Doue.

— Mar deo guir kement-se, a lavar ar beleg braz, kit e peoc'h ha ra blijo gat Doue Israël selaou ho peden !

— Plijet gat Doue, a lavar Anna, kaout mad va feden ! »

Adalek neuse, Anna a deuas da laouennat. Antronoz, mintin mad, e tistroas da adori an Aotrou dirak he aoter ha goudeze e tistroas d'ar gear, da Ramatha.

Jehovah ne ankounac'heas ket he zervicherez. Abalamour d'he feden kalounek, e ro dezhi eur map ag a hanvas Samuel, da lavaret eo, roet gat Doue.

Kerkent a ma c'hellas ar c'hrouadur dioueret d'he vam, Anna a reas d'he goaz dispartia tri ejen evit ar sakrifs ; tri muzul bleud hag eur podad guin. Mont a rejont o daou gat ho map, oajet neuze a dri bloaz, bete tabernakl an Aotrou. Kinnig a rejont ar c'hrouadur da Heli, ar beleg-braz.

« Aotrou, eme Anna, a sonj o c'heus euz ar paour-keaz maouez dizher a ioa bet epad pell amzer dirazoc'h e pedi Doue da rei dezhi eur map ? Me

va unan oa. Doue en deus va zelaouet en eur rei d'in ar potr-ma ha me a meus her goestlet d'he zervic'h e douk he holl vuez. »

Setu Anna, he c'haloun leun a joa hag a anaoudegez vad evit ar burzudou great evithi, a gan da Zoue eur c'hantik a veuleudi evel an hini a gano divezatoc'h an hini a vezo hanvet eüruz gat an holl boblou.

« Va ene, emezhi, a lamm gat ar joa e Doue, va Zalver. Doue ebken a zo santel ; Doue ebken a zo kreñv ; Doue ebken a vel er c'halonou ar sonjou muia kuzet.

« Paoezit, tud a foug, da vernia ho komzou goulo. Goarek an den kreñv a zo torret hag an dud dinerz a deu da veza kreñv ; an dud pinvidik a glask ho bara hag ar beorien o deus pe adra. Ar c'hreg dizher a deu da veza mamm hag an hini a lakea he foug gat an niver euz he bugale a zo dilezet gatho holl.

« Doue eo a ro ar binvidigez hag ar baourentez, an enor hag an dismegans ; heñ eo a denn ar paour euz ar boutren, an den izommek divar an teil evit ho lakaat da azeza var eun tron a c'hloar, e kreiz he brinsed. A ne ket heñ eo en deus diazezet ar bed-ma ?

« Heñ eo an hini a gasso he zent dre an hent eeun, epad ma vezo an den fall, kreñv var he veno, dallet e kreiz an denvalijen. Enebourien Doue a greno pa glevint he gurun ha pa deuio da varn ar bed. Neuze e roio ar galloud d'ar Roue euz he zourn hag e savo skeduz dirak an holl gloar he Grist. »

Ar beleg braz a vennigas Elcana hag ar c'hreg a ioa e paoez komz euz ar Messias, euz eur c'hrou-

adur ag a dlie beza brassoc'h c'hoaz eget he hini. Neuze e tistrojont o daou da Ramatha. Samuel a jommas en templ, dindan lagad Doue ha goard ar belek braz. Eno guisket e guenn e serviche ar belek ouz an aoter ha kreski a rea bemdez e santelez evel ma kreske en oad.

Hogen ar belek bras en devoa ive daou vap. Mez n'oant ket ker fur a Samuel. Heli a ioa koz ha kalz labour en doa da ober. Setu perak en doa roet lod da ober d'he vugale. Mez ar re-ma, evel pa vijent divar an diaoul, a laere ar c'hik hag an druzoni a vije kinniget da Zoue e sakrifis. Kement-se a ioa a enep lezen an Aotrou. Ouspenn-ze c'hoaz, e reant falloniou gat ar merc'hed a vije e tioual an tabernakl. Miret a reant evel-se ouz kalz Israelited da zont da di an Aotrou Doue,

Heli, ar belek koz, en devoa klevet aliez troiou kamm he vugale. Ho gourdrouz a rea. Diskuez a rea dezho edont dre ho buez fall e tenna varnho malloz an Aotrou. « Mar tiouez da eun den, emezha, pec'hi a enep eun den all, e c'hell kaoud an dro da veza pardounet; mez mar pec'h a enep Doue e unan, piou a bedo evitha. » Ar vugale direoll ne rejont nemed goap euz komzou ho zad hag an tad a ioa koz ha n'hen devoa ket a nerz aoualac'h evit ho funissa. Dont a reas a-berz Doue eur profed da gaout Heli hag a lavaras dezha edo e vont da skei var he di taoliou pounner, ma ne laka ket guelloc'h renk e touez he vugale. « Me a roi gloar, eme an Aotrou, da gement hini a rent gloar d'in; mez karga' rin a zismegans ar re o deus evidon disprijans. Poan var boan a guezou var ho famill, ha da genta var ho taou vap a varvo er memez dervez. »

Ar belek braz a oue mantret ha glac'haret; mez nerz a vankas dezha da gorrija he vugale.

Nebeud blaveziou goudeze, ar belek koz, kazi dall, a ioa kousket e kichen an tabernakl, tost d'an arc'h. Eno, araok an deiz, (rak ar seiz lampr aour a ioa c'hoas var elum) Samuel a glevas eur vouez oc'h her gervel. Edo e loja en eur gampr e kichen hini Heli. Kredi a ra eo Heli a zo oc'h he c'hervel ha setu e za dioc'h-tu d'he gaout.

« Va galvet o c'heus, emezha; setu me ama.

— Nan : ne meus ket ho kalvet, a lavar Heli; distroit d'ho kuele. »

A veac'h ma zoa en hem roet da gousket ma klevas ar memez mouez ouz her gervel adarre.

Mont a ra dioch'tu da gaout Heli. « Va gervel o c'heus great, a dra sur. Setu me ama. »

— Nan-Nan, a lavar Heli, ne meus ket ho kalvet. » Evit an trede guech ar c'hrouadur a glevas ar vouez. Mez evel ne ouie ket euz a be leac'h e teue, e zeas adarre da gaout Heli. Hema a velas neuze e tlie ar vouez-se dont euz an eñv :

« Va map, emezha, ma vezit galvet c'hoaz respountit kerkent : « Komzit, Aotrou, ho servicher ho selaou. »

Gat ar c'homzou-ze, Samuel a zistroas d'he vele. Mez klevet a ra adarre ar vouez e lavaret dezha freaz :

« Samuel ! Samuel !

« Komzit, Aotrou; ho servicher ho selaou, » a lavar mignoun iaouank an Aotrou.

Doue e unan eo a deue da ziskleria dezha pegement a reuz hag a drubuillou a ioa e vont da guezha var famill Heli.

« Traou a c'hoarvezo en Israël ag a ve aoualac'h ho c'hounta evit lakaat ar bleo da zével var ar penn. Ar pezh a meus lavaret dija divar benn ti Heli a erruo ha netra iviziken n'elfe va diarben. Heli a oar peger fallagr eo he vugale ha kastizet e vezo e unan dre n'hen deus ket korrijet anezho. »

Dioc'h ar mintin, Samuel a zigoras evel kustum doriou an templ; mez tec'het a rea guella ma c'helle dioc'h ar belek braz evit ne rankche ket kounta dezha ar pezh en doa klevet. Mez Heli a gemennas dezha dont d'he gaout hag a roas urz dezha da lavaret penn-da-benn kement en doa klevet. Ar c'hrouadur a zentas. Heli a zelaouas he gomzou evel deuet a-berz Doue. Pa en doa Samuel perachuet he gomz; Heli strafillet, mez eb klemm, a lavar : « Doue eo ar mestr. Ra vezo great he vontez ! »

Prest goudeze, e teuas da vir ar pezh a lavare Samuel hag Israël a velas e zoa e guirionez profed an Aotrou.



X.

AN ARC'H HA DAGON.

ABAOUE maro Samson, ar Filistined a jommas pell eb dont var douarou Israël. Mez ar barner Heli a ioa koz, dinerz; setu ma teuas dezho c'hoant da zilamm adarre var ar vro. E kichen Aphec oue an emgann; mez n'o devoe ket a boan e tont a benn euz a eur bobl ag en doa displijet da Zoue. An Israelited ne ellent ket koumpren e vijent bet kannet hag evit venji ar pevar mil den a ioa bet lazeta dezho, oue kasset kannaded da Silo da gerc'het an Arc'h a allians. Sonjal a rea dezho e vijent treac'h d'an inimied epad ma vije an Arc'h-se en ho zouez. Daou vap Heli, Ophni ha Phinees, oue karget d'he digass. Kerkent a ma oue guelet er c'hamp, ar zoudarded a zirollas da grial gat ar joa ken na gemeras aoun arme ar Filistined : « Maleur deomp, a lavare ar zoudarded. Setu deuet Doue Israël e penn he armeou. Piou elfe hon dioual a enep an hin en deus great guechal kement a zrouk d'an Ejiptianed. » Mez ar mistri a gennerzas ar zoudarded en eur lavaret dezho. « Filistined, tud kalounek, a c'hoant o c'heus da veza sklaved an Hebreed-se a ioa brema en ho kalloud ? N'o pezet nep aoun ha skoit kreñv. » Senti a rejont

ha gounid a rejont ive ar viktor. Tregont-mil Israelit a jommas var an dachen hag ar re-all a gemeras an teac'h. An Arc'h santel a guezas etre daouarn an inimied. Ophni ha Phinees a varvas en abaden.

D'an abardaez, eur zoudard euz Benjamin a er-rue e Silo, e zillad roget, he benn goloet a ludu. Pa lavaras ar pezh a ioa bet, e savas hirvoud ha kri a-forz. Heli a ioa neuze azezet e dor an tabernakl, tro etrezek an hent, evel pa o dije bet he-zaoulagad maro c'hoant da velet an Arc'h e tistrei. Rak kalz neac'h en doa gathi. Goulen a reas perak oa kement a drouz e kear. Neuze e c'herruas gatha soudard Benjamin :

« Me, emezha d'ar belek koz, a deu euz an dachen vrezel.

— Petra' zo bet eno, va mabik ?

— Israël en deus ranket tec'het; eun niver braz a dud a zo lazeta; ho taou vap a zo e touez ar re varo hag an Arc'h santel a zo eat gat ar Filistined.»

Kerkent a ma klevas ar c'homzou diveza-ma, evel pa vije skoet gat ar gurun, Heli a guez a stok he gorr d'an douar; he benn oue fraillet hag e varvas raktal. Epad daou-ugent vloaz oa bet e c'hoularn Israel. Mez re jentil oa ha lezer a reas da vont var gresk techou fall ag a gollas anezha, he vugale hag ar vro.

Etretant, ar Filistined, joa gatho da veza paket eur preiz ag a dlle tenna kement a enor var ho doue Dagon, a zougas an Arc'h santel e templ an idol, evel ma vez kaset eur prizounier e c'harz treid he vestr. Mez, antronoz, e ouent mantret holl pa veljont Dagon astennet d'an douar dirak an Arc'h. An

imaj a oue lakeat adarre en he flass gat ar brassa respet. Mez d'an deiz var-lerc'h edo a dammou, ar c'horv braz dirak an Arc'h, ar penn hag an treid var trujou an templ. Ouspenn-ze diroll a reas varnho eur c'hlenved spountuz. Dont a reas ive e kear Azoth hag er meziou divar-dro torrajou logod ha razet ag a rea ar brassa distruj. Ar bobl, e kreiz he enkreiz, a c'houlennas ma vije pelleat dioutho an Arc'h. « Ne ellomp ket he derc'hel, emezho; ober a ra d'eomp kement a zrouk ag e deus great d'hon doue. »

Goude beza sonjet er-vad petra' vije ar guella da ober, ar mistri braz, var an ali roet dezho gat tud Jeth, a lavaras e vije douget an Arc'h euz an eil karter d'egile. Kement-se oue great. Mez ar c'hlenved a iea da heul. Setu tud Akaron, pa veljont an Arc'h e tont varzu enno a c'houlennas grouns digat ar vistri petra oa dezho digass en ho bro ar c'hlenved hag ar mervent. Sevel a reas aoun gatho ha mont a rejont da gaout ar sorserien hag an divinourien : « Red eo kass an Arc'h en dro gat enor, emezo, evit terri koler Doue Israël. Ne dal ket ar boan klask gourin outha. Pharaon, guechall, a reas he benn fall. Mez red-mad oue dezha plega pa guezas goalinier Doue var an Ejipt. Oc'h penn-ze, ne ket diez deoc'h gouzoud petra' fell da Jehovah.

« Lakit an Arc'h hag ho prof var eur c'har nevez. Starnit outha diou vioc'h nevez alet ha n'int ket bet morse starnet. Al leou bihan a jommo er c'kraou, mez an diou vamm a vezo lezet kabestr gatho da vont en tu ma kirint. Mar deont etrezek Bethsames, an dosta kear a Israël, e vezo eur merk anat oump skoet gat Doue; mar tistroont d'ho c'hraou,

e c'hellit kemeret ar c'hlenvejou-ze evel eun drouk deuet ne c'houzor ket penaoz. »

Ar cheffou a heulias anali-ze. An holl a jommas estounet e velet ar zaoud e vont en eur vlejal etrezek Bethsames, eb trei nag a gleiz nag a zeou. Pa zint erruet er penn pella euz a vro ar Filistined, ar re-ma a zistro d'ar gear hag a lez an Arc'h gat bugale Israël. Nak a joa pa eljont kaout adarre an tenzor kaer o doa kollet ! Gouskoude e kreiz ho le-venez, e savas eun nebeud kaoñ. Rak trivec'h-ha-tri-ugent Bethsamit a varvas var ar taol evit beza sellet despet difen Doue ouz an Arc'h dizolo. An taol-ze a roas kement a spount da dud Bethsames ma pedchont ho breudeur euz Kariatiarim da zer-c'hel an Arc'h gatho. Chomm a reas eno, var lein ar menez, e ti al levit Abinadab.

Mez Jehovah a dlie kaout he dro oc'h ar Filistined a ioa abaoue keit amzer ec'h ober poan d'he bobl. Ugent vloaz goudeze, Samuel a oue lakeat e penn ar vro. Kenta tra a reas oa kemenn d'an dud a ioa e c'houarn peb tribu dont assamez d'he gaout. « Mar o c'heus c'hoant, emezha, da veza mignoun adarre d'an Aotrou ho Toue, stlapit pell diouzoc'h imachou Baal hag Astaroth. Netait ho kalounou hag adorit Jehovah. Breac'h Jehovah ho tenno a dre daouarn ar Filistined. » Israël a zentas ouz ar barner nevez ha terri a reas ho fenn d'an holl idolo-lou a ioa er vro. Urz a roas goudeze dezho da vont bete Masfat evit pedi assamez an Aotrou da zellet a drez outho. Goude beza iunet ha kinniget sakri-fisou, da Zoue ar bobl a grias var eur vouez : « Anzaa a reomp or beus pec'het a enep Doue. » Ar c'hri-ze deuet euz ar galoun a bignas bete tron an Aotrou.

Epad ma rea an Israelited ho fedennou, ar Filistined, skuiz, e velet anezho ec'h en zarempred evel a reant a deuas a lamm varnho. Bugale Israël n'oant ket eb enkreiz. « Ne ehanit da bedi evidomp, a lavarent da Samuel, ma tiouallo ac'hanomp a enep ar Filistined. » Samuel a gemeras eun oan ; he ginnig a reas e sakrifi da Zoue hag her pedi a reas da zioual mad he bobl. — D'ar moment-se, ar Filistined a zaille var an Israelited : Mez Doue a dor-ras ho err. En eun taol, ar gurun a grozas gat eun trouz spountuz hag ar zoudarded a oue ker strafillet ma kemerjont an teac'h. Israel n'en doue netra da ober nemed mont var ho lerc'h d'ho c'hass kuit. Evit derc'hel memòr euz ar burzud-se, etre Sen ha Masfat, Samuel a zavas eur mean braz hanvet gantha *mean ar zikour*.

Goude ar viktòr-ze, Israël ne rankas ket mui paea kargou hag he c'heriou a oue roet dezhi en distro. Adalek neuze hag epad ma oue Samuel barner, ne oue ket unan ebken euz ar broiou-ze guer-zet d'an idoloù ec'h en hem gemer oc'h Israël.

Setu a-ze penaoz, epad an hir amzer m'oa bet ar barnerien e penn Israël, e tiskuez Doue sklear d'an holl e zeo Heñ ar mestr ha roue braz an holl bo-blou.

He brovidans a zo mad evit ar re her servich ; mez ive he justiss a sko var ar re a dro kein dezha.





TAOLEN.

	PAJEN.
I. Ar barnerien.	5
II. Debora, ar profetez	12
III. Jedeon	19
IV. An tri c'hant den dispount	25
V. Goestl Jefte.	31
VI. Samson	39
VII. Gouriner Jehovah.	43
VIII. Dalila	48
IX. Samuel	53
X. An Arc'h ha Dagon	59

